


Kentañ galloud ekonomikel bedel: SUA

I. Kentañ plas er bed evit ar gounidoù

A. Ar PDG

1. Penaos emañ plaset SUA evit ar PDG?.....
2. E-keñver stadoù europat?.....



B. Skouer el labour-douar

Diell 2: al labour-douar, benveg ar galloud amerikan

Get 62 million a donennoù, ar SUA n'int ket ar re gentañ produerien vedel evit an ed (Bro India a brodu kement ha Bro Sina div wech muioc'h). Met an Amerikaned a zo ar re gentañ evit ezporzhiñ, é kas pep blezad 30 million a donennoù, da lâret eo un drederenn ag ar c'henwerzh bedel. Ar pezh a zispleg rol pouezus ar Yalc'h evit ar greun e Chicago, ar Chicago Board of Trade. Amañ e vez renet ar prizioù evit an ed hag ar produioù labour-douar arall èl ar mais hag ar soja.

Gérard Dorel, *Documentation photographique*.
"La puissance des Etats", Kerzu 1998.

C. Skouer en industriezh

Diell 3

Industriezhioù	Renk bedel	Lodenn er produadur bedel
Karr-tan	1añ	21%
Dir	3vet	12%
Urzhiataer	1añ	45%
Industriezh apotikerezh	1añ	30%

3. Penaos emañ plaset an embregerehoù amerikan er bed?.....




Diell 4: Wikipedia

Ar ar 100 kentañ embregerezh bedel hervez ar CA e vez 31 amerikan e 2007 èl industriezh sevel korr-nij ([Boeing](#)), ar boesonoù ([Coca-Cola](#)), ar poelladoù ([Microsoft](#)), an urzhiataer ([Hewlett-Packard](#)), produioù evit an ti ([Procter & Gamble](#)), an eoul-maen ([ExxonMobil](#)), an apotikerezh ([Johnson & Johnson](#)), ar semi-conducteurs ([Intel](#)), an telekomunikadurioù ([AT&T](#)),

D. Arouez ar galloud amerikan

Diell 5: Kentañ pol teknologel er bed eo ar Silicon Valley.

Ic'hiet e-barzh bar San Francisco e Kalifornia. Muioc'h evit 7000 embregerezh e vez du-hont hag a stroll 2 vilion a skiantourien, ar pezh a ra ul lec'h pinvidikañ er bed. Silicon Valley a vez graet ag al lec'h-se tennet ag ar produ silikon implijet evit ar c'hrugoù urzhiataer. Reprzantiñ a ra 20% a oberiantizoù bedel àr teknologiezhioù an titouriñ (Genrouedad ha mediaoù...) A-gevred e labour ar pol get skolioù-meur amerikan.




4. Petra eo skouer ar galloud amerikan?.....

5. Roit anvioù embregerezhioù amerikan high-tech?.....

.....

II. Kentañ Stad evit ar postadurioù?



7. Peseurt moneiz e vez implijet ar muiañ evit an eskemmoù etrevroadel ?.....




Diell 6: an dollar, moneiz etrevroadel

8. Diell 8 E men e vez graet ar postadurioù ? Perak?.....

Diell 7: ar moneizioù e-barzh an eskemmoù etrevroadel e %

Diell 8

III. Kentañ Stad bedel evit ar c'henwerzh




9. Petra eo plas SUA er bed evit ar c'henwerzh? diell 9

10. Diell 9: petra e vez ezhporzhiet dreist-holl?.....

11. Diell 10: deskrivit ar bouezerez kenwerzhel (diforc'h etre an ezhporzhiadurioù hag an enporzhiadurioù)?.....

Diell 9	% bed	Ren ker bed
Produadur al labour-douar ezhporzhiadur -mais	20%	1
-soja	40,6%	1añ 1añ
An industri	25%	1
Kenwerzh ar bed	17%	2
Ezhporzhiadur ar bed	17,5%	2
Enporzhiadur ar bed	24%	1



Diell 10: ar bouezerez kenwerzhel amerikan